

KANTIG SANT PER

Aotrou sant Per, hor sant patron Kreskit hor feiz, hon nerz kalon

Ma vezimp holl gwir vugale D'an iliz savet gant Doue

1. Pesketour lenn Jenezaret, gant hor Zalver pa z'eo galvet
Da saveteiñ an eneoù raktal a lez e rouejoù
2. E feiz zo kreñv ha d'hor Zalver oc'h embann mister an aoter
E lavar : « C'houi, ha c'houi hepken, a ro d'an dud gwir sklêrijenn »
3. Kalz n'anavezont ket Jesus, daoust d'e oberoù burzhudus :
Simon a lavar koulskoude : C'hwi eo ar C'hrist, gwir Vab Doue »
4. Ha Jezuz d'ezhañ e respont : « Te a zo Pêr, ar gwir maen font
A voi diazezet warnañ, an Iliz Santel er bed-mañ »
5. « Te a vo Priñs an Ebestel, ha kentañ Pab an dud fidel
Eus Rouantelezh an Nenvoù, me roio did an alc'hwezioù »